

# AN TRI ROUE

Komzou an Ao. BAYON.

TON gant An Ao. Dudius.

## Kenta Ioden: « SELLOMP! »



Eur ste - re - den e deuz splan-net, An tri Roue  
o deuz he gue - let. A - na - ve - zet o  
deuz enn - hi Am-brou-ge - rez dous ar Mes - si.

1. — Eur Stereden e deuz splannet.  
An tri Roue o deuz he guélet.  
Anavezet o deuz ennh  
Ambrougerez dous ar Messi.
2. — O velet ar Stereden vrap  
An Tri Roue ' lavar etrezo :  
« Diguezet eo an amzeriu  
Kanet gant ar profesiu.

3. — 'Vel ar frouez euz ar bleuniou  
Ganet eo Salver ar poblou.  
Deomp da heul e Stereden,  
Da velet e pe deach 'ma-hen.
4. — Fors e pe leac'h emañ ganet,  
— Ti soul pe di alaouret —  
Deomp da rei hor c'harantez  
D'an hini 'ra deomp madelez.

## Eil Ioden: « DEOMP! »



Ha se - tu int dre an hent - chou, Ep  
aoun e - bed rag ar c'ho - jou Leun a bep  
seurt loe - ned gou - ez: Ho feiz a zo kren-voc'h bem -  
dez, Ho feiz a zo kren-voc'h bem - dez.

5. — Ha setu int dre an hentchou,  
Ep aoun ebed rag ar c'hoajou  
Leun a bep seurt loened gouez :  
Ho feiz a zo krenvoc'h bemdez. (bis)
6. — En noz ar Stereden ' splanne,  
Da ziskuez hent d'an tri Roue ;  
Hag ar stered all dirazi  
A guze, ma c'hellfe skedi.

7. — Pell amzer e rankjont bañe,  
Dre hentchou diez, noz ha de.  
Mes biskoaz 'ne gelljont kalon  
O tigas peb e zolezon.
8. — Ha pa dardaz ar Stereden,  
A-uz d'eur c'hraou dister ha ien,  
E kavjont ar C'hrouadurik  
Kousket var barlen he Vammik.